

# 1

## AR MOUTIGOÙ

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, ma zad ! Kontañ a ri un istor din ?**

Tad : **Ya, ar moutout ?**

Merc'h : **O, ya !**

Pajenn 1

Merc'h : **-Petra 'n deus ar paotr bihan gantañ 'barzh e zorn, ma zad ?**

Tad : **-E voutout 'n hini eo, evel al lapin feur a vez ganit dalc'hmat !**

Pajenn 2

Merc'h : **-Ken pell zo emañ ganin ken ne'm eus ket soñj pedavare em boa bet anezhañ.**

Tad : **-Kavout a ra din emañ ganit abaoe e oas bihan-bihan bihan-bihan.**

Pajenn 3

Tad : **-Ur mignon kozh eo ur moutout, e-giz un tamm diouzhimp. Diaes e vezer pa ne vez ket aze.**

Pajenn 4

Tad : **-Pa zalc'hez anezhañ kreñv e vez aezetoc'h dit gortoz ac'hanomp pa ne vezomp ket aze.**

Merc'h : **-Ya, un tamm bihan eo evel pa vijes bet ganin. Ha koulskoude n'out ket !**

Tad : **Setu !**

Pajenn 5

Tad : **-Lod bugale o deus ur moutout, ha lod all n'o deus ket. Pa vez unan e vez aezetoc'h chom kousket. Koñfortus eo pa vez 'tal kichen da fri ; klevet a rez e c'hwez.**

Merc'h : **-Just a-walc'h, ma zad, ne blij ket din pa vez gwalc'het ma lapin, abalamour goude ne vez tamm c'hwez ebet gantañ ken !**

Pajenn 6

Merc'h : **Abalamour da betra emañ ar plac'h vihan o vlejal ?**

Tad : **-Abalamour ne gav ket he moutout, marteze. Gwelout a rez ? Klask anezhañ a ra. Ha teñval eo he fenn. Pa zegouezh se gant an nen e c'hall kaozeal gant e dad pe gant e vamm ha war-lerc'h ez a gwelloc'h ar jeu.**

Pajenn 7

Tad : **-Pa soñjer mat, ar gwellañ moutout... eo kaozeal gant ar re all !**

# 2

## EN DOUR

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, ma zad ! Kontañ a ri un istor din ?**

Tad : **Peseurt hini ? « E-barzh an dour » ?**

Merc'h : **O, ya !**

Pajenn 1

Tad : **-A-raok dont war an douar e vez ar vabiged nav miz e-barzh an dour, goudoret-mat e vezont e-barzh kof o mamm.**

Pajenn 2

Tad : **-Abalamour da se an hini eo, marteze, e plij kement dezhe en em gavout e-barzh an dour, un eñvoren ken dous ha ken plijus eo.**

Pajenn 3

Merc'h : **-Plijout a ra din mont d'ar poull-neuial met gwechoù em bez un tamm aon memes tra.**

Tad : **-Ya, met pa vez un den bras ganit o terc'hel da zorn dit e vezet dinec'het, laka ?**

Merc'h : **Mmm mmm !**

Tad : **-Un troad a vez lakaet er poull, ha neuze egile ; ha dousik en em gustumer ouzh an dour.**

Pajenn 4

Tad : **-A-raok splujañ e sach an nen e alan, c'hwezañ a ra e skevent, ha neuze e lamm e-barzh an dour... Plaouf ! Ha houp ! Sevel a ra war-c'horre evel ur stouv.**

Pajenn 5

Merc'h : **-C'hi c'hi ! Fentus eo ! Pa zigoran ma daoulagad e-barzh an dour e welan dispis pep tra.**

Tad : **-Gwelloc'h c'hoazh pa lakez ur maskl pe lunedoù-splujañ ; gallout a rez gwelet pep tra, betek ar strad !**

Pajenn 6

Merc'h : **Ma zad, peseurt mod e ra ar plac'h vihan da neuial ?**

Tad : **-Gwelet a rez ? Astennet eo a-c'hwen war an dour, evel-se, difiñv, e chom war-neuñv. "C'hoari 'r plankenn" a vez graet eus kement-se.**

Pajenn 7

Tad : **-Pa soñjer mat, eürus e vezer e-barzh an dour, evel ar pesked.**

### 3 AN DISPARTI

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, mamm ! Kontañ a ri un istor all din ?**

Mamm : **Ya, evel-just. Selaou homañ.**

Pajenn 1

Mamm : **-Karantez ur gwaz hag ur vaouez eo a laka ar vugale da zont war an douar.**

Merc'h : **Hon tad hag hon mamm eo !**

Mamm : **Ya.**

Pajenn 2

Mamm : **-Met siwazh, a-wechoù ne vez ket ken trawalc'h a garantez etrezo.**

Merc'h : **Petra a erru neuze ?**

Mamm : **-Ac'hanta, pa ne vezont ket ken evit en em glevet tamm ebet...**

Pajenn 3

Mamm : **-...e vez gwelloc'h dezho dispartiañ a-wechoù. Lavaret e vez e tibriedont.**

Merc'h : **Ha pa vez unan dioute ha n'houl ket dispartiañ ?**

Mamm : **Tabutoù bras a c'hall bezañ neuze.**

Merc'h : **O !**

Pajenn 4

Mamm : **-Gwelet a rez, evel barradoù arnev pe glaveier kreñv eo an tabutoù. Un deiz e sioulaont, hag e paouezont.**

Merc'h : **-O, ma Doue ! Pegen maleürus e ranker bezañ pa vez trouz gant hon tud e giz-se !**

Mamm : **Ya, a-wechoù en em gaver evel troc'het e daou.**

Pajenn 5

Merc'h : **-Ya, met pelec'h e vev hon tud pa vezont dispartiet, mamm ?**

Mamm : **-Neuze o devez pep a di, gant ul lec'h evit o hollvugale.**

Pajenn 6

Mamm : **-Met, gouzout a rez, zoken pa vezont dispartiet, un dra zo ha ne gemmo biken : atav e vezint hon tud, o-daou.**

Pajenn 7

Mamm : **-Pa soñjer mat, pa chom mignoned an dud dispartiet eo mat evit ar vugale.**

### 4 GWISKAÑ DILHAD

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, ma zad ! Kontañ a ri un istor din ?**

Tad : **Ya, moarvat ! Hini an dilhad ?**

Merc'h : **O, ya !**

Pajenn 1

Tad : **-Bemdez, a-raok mont er-maez, e lak an nen e zilhad. Ur stumm mat eo da wareziñ ar c'horf.**

Merc'h : **-Eus ar beure, me 'blij din dibab ma dilhad, ha 'n em wiskañ ma-unan.**

Pajenn 2

Tad : **-Ya, gouzout a ran. Er penn kentañ e vezer sikouret. Rak n'eo ket aes d'ur bugel bihan gwiskañ e vailhurenn e-unan. Ezhomm en deus eus e dad pe e vamm. Neuze, tamm-ha-tamm...**

Pajenn 3

Tad : **-...e teuo a-benn da wiskañ e zilhad e-unan. Met ret eo sellet mat ouzh an dilhad evit lakaat anezhe mat. Un tu dirak hag un tu a-dreñv o deus ar brageier, gouzout a rez ?**

Merc'h : -(c'hoarzhadennoù) **Gwechoù e lakan anezhe fall. Ha neuze e vez ret adober tout !**  
Pajenn 4

Tad : **-N'eo ket strikt ! Dilhad-dindan flour a vez lakaet war ar c'hroc'hen, ur roched a vez gwisket goude-se, hag ur stammenn ma ne vez ket re domm an amzer. Daoust hag-eñ ez peus gwelet e vez alies ul liketenn a-dreñv ar c'holier ?**

Merc'h : **Mmm mmm !**

Tad : **Ma, diskouez a ra dimp pelec'h emañ kein an dilhad.**

Pajenn 5

Merc'h : **-Sell, ma zad ! Ar plac'h vihan zo ur vroz evel ma hini ganti !**

Tad : **-Hañ ya 'vat ! Tennañ a ra diouti. Hag evel da hini ez eus brikoloù hag ur serr-prim outi.**

Pajenn 6

Tad : **-Gant an dilhad e vezer gwarezet diouzh yenijenn ar goañv. Pa 'z eer er-maez e lakaer ur skerb, ur boned, manegoù hag ur vantell domm.**

Merc'h : **Ha pa ra glav e lakan ma mantell-c'hlav.**

Tad : **Ya, moarvat sur !**

Pajenn 7

Tad : **-Pa soñjer mat, an hini zo kap d'anavezout an troad mat evit pep botez ha da skoulmañ e lasoù zo erru bras a-walc'h dija.**

## 5 AR MOUMOUNOÙ

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, mamm ! Kontañ a ri un istor all din ?**

Mamm : **Ya, evel-just. Hini ar moumounoù ?**

Merc'h : **O ya, mamm !**

Pajenn 1

Mamm : **-Met, lavar din, ma bihanig, ha soñj az peus eus ar varzhoneg az poa desket ?**

Merc'h : **Barzhoneg ar moumounoù ?**

Mamm : **Ya, honnezh.**

Pajenn 2

Merc'h : **O, ne'm eus ket gwall soñj ken !**

Mamm : **Ale, klask memes tra !**

Merc'h : **-C'hem c'hem... Moumoun, moumoun da'm mammPlijout a ra din un añ bihan Moumoun, moumoun da'm zad Un famm ton a ra vad.**

Pajenn 3

Merc'h : **-Ur pok war da jodUr bouch bihan...**

Mamm : **...war ma...**

Merc'h : **-...war ma fri Pignat a ran war da varlenn Evit kaout ur moumoun bihan.**

Pajenn 4

Merc'h : **-...Me 'ray dit ur moumoun koant Ro din ur pok bihan !Me 'ray dit ur moumoun c'hoazh Ro din ur bern pokoù bras Moumoun, moumoun bihan Karout a ran ac'hanout mamm.**

Pajenn 5

Mamm : **-Mat-tre, va lollig ! Ur varzhoneg tener eo, koant-tre a gavan anezhi.**

Merc'h : **-Ha me ivez, mamm, peogwir e plij din bezañ moumounet.**

Mamm : **Ya, gouzout a ran, lamponezig !**

Pajenn 6

Mamm : **-Mil doare a zo da voumounañ : gant ar c'hein, gant an treid, gant an daouarn, gant an daoulagad. Tu zo d'ober pokoù eskimo gant begig ar fri, zoken.**

Pajenn 7

Mamm : **Pa soñjer mat, nag a vad a ra ur moumounig.**

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, mamm ! Kontañ a ri un istor all din ?**

Mamm : **Peseurt hini ? « Ur babig er gêr » ?**

Merc'h : **O, ya !**

Pajenn 1

Mamm : **-Gwelet a rez ? Emañ ar vamm o tont eus ar wiliouderezh gant he babig.**

Merc'h : **-Pa zeui war da giz gant ar babig, ez eo me a ziskouezo tout an ti dezhañ !**

Mamm : **Ya, hag ur profig a zegaso dit.**

Pajenn 2

Mamm : **-Kalz evezh ha preder a c'houlenn ur babig. Er penn kentañ ec'h ev laezh dreist-holl.**

Merc'h : **O, sell, emañ ar babig o tenañ e vamm !**

Mamm : **Heñvel e oa evidout pa oas bihan.**

Pajenn 3

Mamm : **-Hag aze emeur o reiñ ur gibelladenn dezhañ. Bemdez e vez graet.**

Merc'h : **-Me a blijfe din sikour ma zad, ivez, pa vo o walc'hiñ ar babig.**

Pajenn 4

Mamm : **-Hag evit ma chomfe naet e vez cheñchet e lienenn dezhañ meur a wech bemdez.**

Merc'h : **En em louzañ a ra kalz ur babig ?**

Mamm : **Ya 'vat ! Sell, kalz dilhad zo o sec'hiñ en ti.**

Pajenn 5

Mamm : **-Ac'hanta ! Setu ar babig en e garrig, hag e c'hoar vras o tont eus ar skol.**

Merc'h : **-Mañ o tiskouez he breur bihan d'he mignoned. Dleout a ra bezañ plijus.**

Pajenn 6

Merc'h : **Abalamour da betra eo trist ar plac'h vihan, mamm ?**

Mamm : **-Abalamour a-wechoù e kred ar vugale e vez graet muioc'h war-dro ar babig hag un tammig nebeutoc'h war o zro.**

Pajenn 7

Mamm : **-Met traoù disheñvel a vez graet gant ar re vras. Pa soñjer mat, dreist eo bezañ ur c'hoar vras.**

## 7

### AR SOTONIOÙ

Merc'h : **Ac'hanta, ma zad ! Kontañ a ri un istor din ?**

Tad : **Ya. Hini ar sotonioù ?**

Merc'h : **O, ya !**

Pajenn 1

Merc'h : **O ! Sell ar paotr bihan aze, ma zad !**

Tad : **Ac'hanta ! Graet eo ar sotoni !**

Merc'h : **Ya, met marteze e oa o klask sikour distaliañ an daol.**

Tad : **-Ya. A-wechoù hon devez ur mennozh mat, met c'hwitañ a ra. Neuze e teu da vezañ ur sotoni.**

Pajenn 2

Tad : **Sotonioù bihan ha sotonioù bras zo ivez.**

Merc'h : **-Ya, ha bezañ zo sotonioù bihan ha ne reer ket anezhe espres-kaer !-**

Tad : **-Gwir eo. N'eo ket memes mod ober ur pezh sotoni espres-kaer hag unan all hep kaout c'hoant d'ober.**

Pajenn 3

Tad : **-Pa c'hoariez gant ruz-muzelloù da vamm e kav dezhi eo ur sotoni.**

Merc'h : **-Ya. Ha te az poa graet trouz din pa'm boa laosket digor kog ar gibell.**

Tad : **Ya, peogwir e oa ur sotoni ivez.**

Pajenn 4

Merc'h : **Te ivez, ma zad, a rez sotonioù gwechoù.**

Tad : **Ya 'vat ! Degouezhout a ra din ivez !**

Merc'h : **-Ma breur bihan ha me hon eus bet plijadur an deiz all pa'z poa toalet alc'hweziou ar wetur e-barzh ar pod-loustoni !**

Pajenn 5

Tad : **-E-barzh ar skol, evit da skolaerez, eo ur sotonni skrivañ war ar mogerioù. Ha koulskoude ez eus arzourien eo o micher livañ taolenoù war mogerioù kêr.**

Pajenn 6

Merc'h : **-Gwechoù e reomp sotonioù abalamour ma ne vez ket taolet pled dimp trawalc'h.**

Tad : **-Ya, met sotonioù dañjerus-tre zo ivez, pa reer traoù difennet, evel c'hoari gant an tan.**

Merc'h : **A ya, met gouzout a-walc'h a ran, ma zad.**

Pajenn 7

Tad : **-Pa soñjer mat, tout an dud a ra sotonioù ur wech an amzer.**

## 8 MERC'HED HA PAOTRED

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, mamm ! Kontañ a ri un istor all din ?**

Mamm : **Ya, peseurt hini ? « Ar merc'hed hag ar baotred » ?**

Merc'h : **O, ya !**

Pajenn 1

Mamm : **-An holl baotred vihan a zeu da vezañ gwazed evel o zad. Hag an holl wazed zo bet paotred vihan e penn kentañ o buhez.**

Pajenn 2

Merc'h : **Ya, met memes mod eo evit ar merc'hed, mamm ?**

Mamm : **-Ya, an holl verc'hed bihan a zeu da vezañ maouezed, hag an holl vaouezed zo bet merc'hed bihan a-raok.**

Pajenn 3

Merc'h : **Memes te, mamm ?**

Mamm : **-Ya, evel-just. Disheñvel-bras eo ar merc'hed diouzh ar baotred avat. N'o deus ket ar memes reizh, ha ne gresk ket o c'horf er memes doare.**

Pajenn 4

Mamm : **-Ar c'hemm brasañ eo e c'hello ar merc'hed dont da vezañ mammoù, ha dougen ur babig en o c'hof a-drugarez da garantez ur paotr, a vo deuet da vezañ tad neuze.**

Merc'h : **Evel ma zad !**

Pajenn 5

Merc'h : **-Ac'hanta, me, e-barzh ar skol, ar baotred ne zihanont ket da glask jeu diouzhin !**

Mamm : **-Ya, met chikan a vez alies etre merc'hed ha paotred. Evit en em anavezout gwelloc'h eo. Plijout a ra d'ar merc'hed huñvreal en dazont, hag a-wechoù o devez amourouzien vihan dija. Alies e plij d'ar baotred diskouez o nerzh.**

Merc'h : **Ya, met amourouzed o devez ivez !**

Pajenn 6

Mamm : **-Ya. Met ul lezenn a rank bezañ heuliet gant tout an dud war an douar : morse ne zimezer gant hon tad pe hor mamm, zoken mar fellfe deomp ober pa vezomp bihan.**

Pajenn 7

Mamm : **-Pa soñjer mat, pouezus-tre eo kreskiñ e-kichen ar re vras, ha soñjal e vimp evelto un deiz bennak.**

## 9 BRAV EO

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, mamm ! Kontañ a ri un istor all din ?**

Mamm : **Ya... « Brav eo » ?**

Merc'h : **O, ya !**

Pajenn 1

Merc'h : **-O ! Mamm ! Me 'garfe bezañ e-krec'h du-hont ! Hardizh eo brav !**

Mamm : **Ya, 'mañ ar gwir ganez, pegen brav eo ar gwel.**

Pajenn 2

Mamm : **-A-wechoù, pa seller ouzh ar vro pe zoken diouzh an noz leun a stered, e-giz ma welez war ar skeudenn, aze, e vez dallet hon daoulagad gant braventez ar bed.**

Pajenn 3

Merc'h : **Oc'h ober petra 'mañ ar paotr, aze, mamm ?**

Mamm : **-Un arzour eo, kizeller eo. Unan eus perzhioù mab-den, te 'oar, eo gallout ijinañ traoù n'eus ket diouto, dre al livañ, ar sonerezh pe ar gerioù. Ha brav eo kement-se.**

Pajenn 4

Merc'h : **O ! Ar vugale zo o c'hoari war an aod !**

Mamm : **-Ya... Int ivez zo kizellerien, un tammig. Ar mor, hag ivez al lennoù, ar stêrioù, an erc'h pe ar skorn, te 'oar, kened an dour he deus meur a zoare da souezhiñ ac'hanomp.**

Pajenn 5

Merc'h : **-Ne oarez ket, mamm ? Me 'blij din sellet ouzh ar c'houmoul e-pad pell.**

Mamm : **Din-me ivez e plij, ijinet e vez ur bern traoù brav.**

Pajenn 6

Mamm : **-E-giz mousc'hoarzh unan a gar ac'hanomp eo, brav-tre eo ivez.**

Merc'h : **O ya, mamm !**

Pajenn 7

Mamm : **-Pa soñjer mat, brav eo ar vuhez pa gemeromp amzer da sellet en-dro deomp.**

## 10 DEIZ-HA-BLOAZ LAOUE

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, mamm ! Kontañ a ri un istor all din ?**

Mamm : **Ya, hini an deiz-ha-bloaz ?**

Merc'h : **O, ya !**

Pajenn 1

Mamm : **-Un devezh pouezus eo hini an deiz-ha-bloaz. Ur bloaz koshoc'h e vezer, ha laouen e vezer o kreskiñ.**

Pajenn 2

Mamm : **-Plijus-tre eo evit ar gerent eñvoriñ devezh ganedigezh o bugel, un degouezh a levez vras e oa, ha lidet e vez.**

Pajenn 3

Mamm : **-Pa vez hon deiz-ha-bloaz o tostaat e c'hellomp kaout c'hoant da zegemer hor gwellañ mignoned.**

Merc'h : **-Ac'hanta, me, ez an da gas fresadennoù dezhe en ul lizher da bediñ anezhe evit ma deiz-ha-bloaz.**

Pajenn 4

Merc'h : **O ! Mamm ! Sell pegen brav eo ar wastell !**

Mamm : **-Ya, farsus eo fichal anezhi, hep diskouez tra d'an hini a lider avat, ur souezhadenn eo.**

Pajenn 5

Mamm : **-Neuze e vez degaset ar wastell, goulaoennoù warni...**

Merc'h : **O ! 'Mañ ar plac'hig o vont da c'hwezhañ warne !**

Mamm : **-Ya, hag an holl asambles a gan "Deiz-ha-bloaz laouen dit..."**

Pajenn 6

Mamm : **-Evit deiz-ha-bloaz ur mignon e c'heller an-unan fardañ ur prof evitañ. Farsusoc'h c'hoazh eo, hag ur prof hep e bar eo evel-se.**

Pajenn 7

Mamm : **-Pa soñjer mat, pa vez lidet hon deiz-ha-bloaz en em santer karet. Ur sikour eo da greskiñ.**

## 11 AR SEVENDED

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, mamm ! Kontañ a ri un istor all din ?**

Mamm : **Ya, hini an dud seven ?**

Merc'h : (etre daou soñj) **Evel 'karez...**

Pajenn 1

Mamm : **-Ne seblantez ket kaout c'hoant bras da lenn al levr-mañ ?**

Merc'h : **Geo met...**

Mamm : **-Gwir eo, ne vez ket atav fentus bezañ seven. Strivañ a reer evit plijout d'ar re all, o saludiñ da skouer.**

Pajenn 2

Merc'h : **Mamm ! Ar re vras ne saludont ket dalc'hmat, ivez !**

Mamm : **-Ya, c'hoarvezout a ra. Lod eus an dud en oad a zo diseven. Met, ma saludez anezho e teski dezho bezañ evezhiantoc'h.**

Pajenn 3

Merc'h : **-Ya, met a-wechoù ne'm bez ket c'hoant da gontañ gante.**

Mamm : **-Plijadur a ra koulskoude. Ur mousc'hoarzhig hepken a zo seven dija. Digeriñ a ra dor ar galon.**

Pajenn 4

Mamm : **-Pa vezer babig ne ouezer ket, huchal a reer kreñv, kounnariñ a reer abalamour d'un diouer a basianted, met d'an oad-se eo reizh. An holl dud vras zo bet babiged.**

Pajenn 5

Mamm : **-Tamm-ha-tamm e teuer a-benn d'en em vestroniañ. Neuze e fizoloer e vezer selaouet gwelloc'h gant ur mousc'hoarzh pe gant ur mar plij. Aesoc'h 'vez d'an holl pa vezer seven.**

Merc'h : **-Gouzout a-walc'h a ran, met, gwechoù, ne soñjan ket lavaret.**

Mamm : **Ma ! Dont a raio.**

Pajenn 6

Merc'h : **-(sirius, ha neuze mousc'hoarzhus) Gwechoù, n'houlenn ket lavaret « kenavo » da'm zad, abalamour em bije c'hoant e chomfe dalc'hmat ganin.**

Mamm : **-Met pa lavarar kenavo da unan bennak e lavarar dezhañ e vimp laouen o welet anezhañ c'hoazh.**

Pajenn 7

Mamm : **-Pa soñjer mat, deskiñ bezañ seven a c'houlenn amzer, met e-mod-se e vez bravoc'h ar vuhez.**

## 12

## FIÑVAL

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, ma zad ! Kontañ a ri un istor din ?**

Tad : **Ya, peseurt hini ? Fiñval ?**

Merc'h : **O, ya !**

Pajenn 1

Merc'h : **-O, ma zad, sell 'ta : ur plac'h vihan oc'h ober penndoullig.**

Tad : **-Gwelet a rez ? Gwevn eo he c'horf evel da hini. Peogwir eo mellet-tout, eus chouk he c'hil betek he zreid.**

Pajenn 2

Tad : **-A-drugarez d'ar skeledenn ha d'ar c'higennoù an hini eo e c'hall ur c'horf fiñval.**

Merc'h : **Ma zad, petra eo ar skeledenn ?**

Tad : **-Ar skeledenn ? Holl eskern hor c'horf an hini eo, mellet an eil re gant ar re all. Hag an eskern eo ar pezh a zo gwenn ha kalet e diabarzh da gorf.**

Pajenn 3

Merc'h : **'Mañ o fiskouez he c'higennoù !**

Tad : **-Ya, dindan ar c'hroc'hen emaint ; stag-mat ouzh an eskern. Ha pa 'n em stignont pe pa 'n em zistignont e lakont anezhe da fiñval. Met dreist-holl eo pa vezont stignet ma vezont gwelet.**

Pajenn 4

Tad : **-Ur fiñvusted vras a vez roet dimp gant ar skeledenn hag ar c'higennoù.**

Merc'h : **Me, pa c'haloupan e teu berr war ma alan !**

Tad : **Ya, ha da galon a lamm fonnusoc'h.**

Pajenn 5

Tad : -**Ret 'vez debriñ a-benn magañ hor c'horf. Div javed eskern hon eus evit se gant dent ivor ha kigennoù nerzhus a ro an tu dimp da chaokat boued.**

Pajenn 6

Merc'h : -**O ! Ar plac'h vihan ne zeu ket a-benn da wiskañ he c'hamizolenn !**

Tad : -(c'hoarzhadennoù) **Fiñvus-tre eo hon dremm, mousc'hoarzhin, komz, tennañ hon teod zoken pe ober ardoù a c'hellomp ober a-drugarez d'ur bern kigennoù bihan.**

Pajenn 7

Tad : -**Dindan ar blev emañ hor c'hlopenn o wareziñ hon empenn. Mestr eo an empenn war hon fiñvoù. Pa soñjer mat, burzhodus eo hor c'horf.**

## 13 HENT AR BOUED

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, mamm ! Kontañ a ri un istor all din ?**

Mamm : **Ya ! Selaou honnezh.**

Pajenn 1

Merc'h : **Pelec'h ez a ar boued pa zebromp ?**

Mamm : **Ma, hent an diazezañ a gemeront.**

Pajenn 2

Mamm : -**An diazezañ a vez graet eus ar pezh a c'hoarvez en hor c'horf pa gemer nerzh eus ar boued a vez roet dezhañ. Pa zebrez un tamm bara e teu blot gant ar glaour, ha pa lonkez e fiskenn a dammoù bihan...**

Merc'h : **...betek ma c'hof.**

Mamm : **Ya, ha betek da stomog da gentañ.**

Pajenn 3

Mamm : -**Da stomog a dro an tamm bara da yod. Neuze e ya ar yod e-barzh da vouzellenn, anezhi un duellenn hir-hir a zibabo dres ar pezh he deus ezhomm evit lakaat ac'hanout da greskiñ.**

Pajenn 4

Mamm : -**Pezh na servij ket dit ken a zeu er-maez e penn da vouzellenn dre ar fraezh, etre da feskennoù.**

Merc'h : **Kaac'h eo ?**

Mamm : **Ya, ha dre aze ivez eo e teu ar brammoù er-maez.**

Pajenn 5

Mamm : -**Mod all da c'hwezigell a zastum an dourennoù o deus echu o labour ez korf : an tifich eo, a zeu er-maez dre galc'h ar baotred ha dre an toullig e-kreiz kourzh ar merc'hed.**

Pajenn 6

Merc'h : -**Mamm ! Gwechoù 'm bez un tamm droug-kof, aze, e-barzh ar c'hreiz.**

Mamm : -**Ul labour gaer a vez graet gant an organoù diazezañ. Bourbouilhadennoù bihan 'vez a-wechoù, pe poanioù bihan, ivez. Ne badont ket pell, peurliesañ.**

Pajenn 7

Mamm : -**Pa soñjer mat, gwelloc'h en em gomprenomp pa ouezomp ar pezh a c'hoarvez en hon c'horf.**

## 14 ALANAÑ

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, ma zad ! Kontañ a ri un istor din ?**

Tad : **Ya, peseurt hini ? « Alanañ\* » ?**

Merc'h : **O, ya !**

Pajenn 1

Tad : -**Tammoù fiñvadennoù 'vez e-barzh diabarzh hor c'horf, santet a-walc'h e vez, trouzioù bihan 'vez klevet a-wechoù. Hon organoù buhez 'n hini eo a vez o labourat hep dihan.**

Merc'h : -**Ma zad ! Pa lakan ma skouarn war da galon, e klevan anezhi o skeiñ kreñv.**

Pajenn 2



Tad : -**Ya, ur seurt bangounell vihan eo hor c'halon. Kas a ra gwad e pep lec'h en hor c'horf. Da vagañ 'nezhañ ha da zerc'hel 'nezhañ kempouez.**

Merc'h : **Hag ar galon a gar, ma zad ?**

Tad : **A, ar galon a gar ? Dre holl emañ, bihan-gaezh !**

Pajenn 3

Merc'h : **Sell 'ta ! Ar plac'h vihan o c'hwezañ ur c'hwezigell !**

Tad : -**Mmm ! Ha gwelet a rez ? C'hwezhañ a ra an aer a zo o tont eus he skevent. E-kreiz ar bruched emañ ar skevent. Evel pochoù-binioù emaint. Pa alanez e teu an aer e-barzh. Ha pa zialanez pe pa basaez e vezont goullonderet.**

Pajenn 4

Merc'h : **Met da betra e talv se ?**

Tad : -**Ma feiz ! Da lakat aer vat da zont e-barzh da gorf ha da gas er-maez an hini na 'c'h eus ket ezhomm dioutañ ken. Evel-se emañ ar vuhez.**

Pajenn 5

Tad : -**An aer az a tre e-barzh da skevent hag a dremen dousik e-barzh da wad. A-drugarez d'ar galon a lak ar gwad da redek e c'hall an aer mont e-lec'h ma zo ezhomm. Degas a ra nerzh... Ha neuze e c'hellez fiñval, lammat, redek ha soñjal ivez.**

Pajenn 6

Merc'h : -**Hañ feiz ! Me, pa'm bez aon, e santan ma c'halon o lammat stank !**

Tad : -**Kreñvoc'h e lamm kalon an nen pa vez spontet pe seder-bras. Reizh eo : mont a ra da heul hon santimantou.**

Pajenn 7

Tad : -**Pa soñjer mat, alanañ eo an dra gentañ a vez graet gant ar vabiged pa devont war an douar.**

\* alanañ = analañ

## 15 MIGNONED A BEP SEURT LIV

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, mamm ! Kontañ a ri un istor all din ?**

Mamm : **Ya, ar « Vignoned a bep seurt liv » ?**

Merc'h : **O, ya !**

Pajenn 1

Merc'h : -**Ac'hanta ! Ur mignon nevez hon eus er skol, Mikael : du eo penn-kil-ha-troad.**

Mamm : **Lavar din 'ta, ha gwelet ez peus e dad hag e vamm ?**

Merc'h : **Ya, pa 'z eo erru.**

Pajenn 2

Mamm : **Ha pe liv eo o c'hroc'hen ?**

Merc'h : **Du-tout, evel Mikael.**

Mamm : **Gwelet a rez, eus e dud e teu liv e groc'hen.**

Pajenn 3

Mamm : -**Pep a liv hor bez pa zeuomp war an douar. Diwar kemmesk kellidoù buhez hon tud e teu. Sklaer eo da hini, du eo hini Mikael, bugale zo avat eo alaouret o c'hroc'hen, pe a-liv gant ar bara-mel.**

Pajenn 4

Merc'h : **Ha tud ar Sav-heol, mammig ?**

Mamm : -**Melen un tamm eo kroc'hen an holl dud en Azia, hag o daoulagad zo e-giz amandez. Kalz a dud er bed a zo er mod-se.**

Pajenn 5

Mamm : -**Estreget liv hor c'hroc'hen a zeu eus hon tud ; tu zo da gaout fri hon tad-kozh pe tal hor mamm-gozh, da skouer.**

Merc'h : -**Ne oarez ket, mamm ? Ma zad a lavar eo heñvel ma daoulagad ouzh da re.**

Mamm : (c'hoarzhadennoù)

Pajenn 6

Mamm : -**A-viskoazh o deus an dud beajet ha kejet. Lod a gar lod all hag e savont familhoù. Pa ziviz ur gwaz hag ur vaouez kaout ur bugel, e lakont perzhioù o zud hag o hendadoù da 'n em veskañ. Liv o c'hroc'hen, da skouer.**

Pajenn 7

Mamm : -Eus an natur e teu kement liv kroc'hen zo. N'eus ket unan bravoc'h evit egile. Pa soñjer mat, den ebet n'en deus **mezha da gaout gant liv e groc'hen.**

## 16 AR BOUBOUIOÙ

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, mamm ! Kontañ a ri un istor all din ?**

Mamm : **Ya, peseurt hini ? « Ar boubouioù » ?**

Merc'h : **O, ya !**

Pajenn 1

Merc'h : **Gloazet he deus ar plac'h vihan he glin !**

Mamm : -**Ya, met dre ma n'eo ket gwall c'hrevus n'eo nemet ur boubou.**

Merc'h : **Fentus e kavan ar poz-se, mamm.**

Pajenn 2

Mamm : -**Pouezus eo naetaat mat ur boubou pa vez traoù lous warnañ. Pa vez gwad e vez ret lazhañ ar garvevien. Digontammiñ a vez graet eus se.**

Merc'h : **Mamm ! Me 'blij din pa lakez un tamm ruz din !**

Mamm : -**Ul lienenn naet a beger da c'houde evit gwareziñ ar boubou.**

Pajenn 3

Mamm : -**Gwelet a rez, emañ ar plac'hig o'n em walc'hiñ. Diwall a ra da nompas glebiañ he lienenn.**

Pajenn 4

Mamm : -**Morse ne bad ar boubouioù. Buan-tre e sec'hont. Arabat skrabañ an drouskennig a laoskont.**

Merc'h : **Mamm ! Me 'm eus div gleizhenn war ma glin !**

Mamm : **C'hem ! Un eñvorennig eo !**

Pajenn 5

Merc'h : **O ! Paour-kaezh bihan ! Ul lopenn en deus war e benn !**

Mamm : -**Ya, met e vamm zo o frealziñ anezhañ. Ar vugale vihan ne vezont ket sonn war o divesker pa grogont da vale. Setu perak eo ret diwall d'o bountañ.**

Pajenn 6

Mamm : -**Ar mezeg a ra war hon tro pa c'hoarvez gwashoc'h eget ur boubou. Ma teuomp a-benn da chom difiñv e vez aesoc'h dezhañ ober war hon tro, ha buanoc'h e vez echuet an abadenn.**

Pajenn 7

Mamm : -**Pa soñjer mat, dre ar boubouioù e tesker bezañ furoc'h hag ampartoc'h.**

## 17 AN TI-FEURM

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, mamm ! Kontañ a ri un istor all din ?**

Mamm : **Hini an ti-feurm ?**

Merc'h : **O, ya !**

Pajenn 1

Mamm : -**Degas a ra da soñj din eus ar vakañsoù a dremenet e ti va zud-kozh. Kuitaat a raemp ar gêr vras ha goude ur veaj hir ez erruemp en ti-feurm. Klevet e veze ar c'hi o harzhal...**

Merc'h : **O ! Dalc'h da lâret, mamm !**

Pajenn 2

Mamm : -**Sevel a raemp mintin mat, hag abred-tre ez aemp da gousket. Tennañ a raemp hor mad eus gouloù an deiz. Me eo a yae bep mintin da zigeriñ d'ar yer.**

Pajenn 3

Mamm : **Labour a veze evit an holl eus ar mintin betek an noz.**

Merc'h : **Oc'h ober petra emañ ar paotr aze ?**

Mamm : -**O lakaat un tamm houarn emañ dindan karn e varc'h. Un tammig evel botoù eo an hern-kezeg.**

Pajenn 4

Mamm : -**Da noz e veze degaset ar saout d'ar gêr da vezañ goroet.**

Merc'h : **Petra eo goro saout, mammig ?**

Mamm : -**Ma, gwelet ez peus c'hoazh, dindan kof ar saout...**

Merc'h : **Ya, ya...**

Mamm : -**...ez eus un tezh roz. E-pad an deiz en em leugn a laezh, ha da noz, er c'hraou...**

Pajenn 5

Mamm : -**...e vez gwasket ar bronnoù evit dastum laezh tomm. Soñj am eus eus e c'hwezh c'hoazh. Mmm ! Na mat e oa !**

Merc'h : **Ar memes laezh a evomp diouzh 'beure ?**

Mamm : -**Ya, ar memes hini eo, nemet eo bet prientet evit bezañ dalc'het pell.**

Merc'h : (c'hoarzhadennoù)

Pajenn 6

Mamm : -**E-barzh un ti-feurm e vez labouret an douar evit gounit legumaj, frouezh, ed ha kement tra zo ezhomm da voueta an dud.**

Pajenn 7

Mamm : -**Pa soñjer mat, tout an dud en deus bet deiz pe zeiz kerent a veve en un ti-feurm, mat eo delc'her soñj eus se.**

## 18

### AR BEAJOU

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, ma zad ! Kontañ a ri un istor din ?**

Tad : **Ya... « Ar beajoù » ?**

Merc'h : **O, ya !**

Pajenn 1

Merc'h : **Sell, ma zad ! Bez' eo eveldomp pa'z eomp en beaj !**

Tad : -**Ya... a-wechoù e vez start lakat an holl valizennoù e-barzh ar wetur. Aze e c'hell an nen koll e basianted. Met n'eo ket strikt !**

Pajenn 2

Merc'h : -**Gwelet ec'h eus ar vugale ? Emaint o c'hoari 'r margodennoù !**

Tad : -**Ur mennozh mat eo. Kalz berroc'h e vez kavet an hent pa vezer o c'hoari sioul e-barzh ar wetur... ha suroc'h en em santer gant ar gouriz stag.**

Pajenn 3

Tad : -**Ha pa vez re hir an hent e c'heller ober un ehan da zivorzañ hon divhar pe d'ober tifich.**

Pajenn 4

Merc'h : **Tapout an treñ a blij din, ma zad.**

Tad : -**Din-me ivez. Gant an treñ e c'haller beajiñ hep skuizhañ. Hag a-wechoù e reer anaoudegezh gant tud a c'hall dont da vezañ mignoned nevez.**

Pajenn 5

Tad : -**Pa vez hir-hir ar veaj e c'heller kousket ur pennadig. Evel-se e tremen an amzer frankil ha brav e-keit ha ma vezer oc'h huñvreal.**

Pajenn 6

Tad : -**Un tamm bihan e vezer glac'haret pa guitaer an dud a garer, memes evit ober ur veaj vrav. Met war-lerc'h e vez plijadur oc'h adkavout anezhe !**

Pajenn 7

Tad : -**Pa soñjer mat, ur bern traoù 'vez desket diwar-benn ar bed hag an dud en ur veajiñ.**

## 19

### AR SKIANTOÙ

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, ma zad ! Kontañ a ri un istor din ?**

Tad : **Ya. Ale ! Selaou homañ.**

Pajenn 1

Tad : **-Lavaret e vez hon eus pemp skiant, met me 'soñj din hon eus muioc'h. Ar blasa eo an hini gentañ. Gant da deod ha diabarzh da c'henoù an hini eo ez pezh plijadur, o febrñ ur gachenn vat, da skouer.**

Pajenn 2

Merc'h : **Mmm ! C'hwezh vat zo er gastelodenn 'vat !**

Tad : **-Ya 'vat ! Gant hor fri e santer an holl frondoù hag an holl c'hwezhoù, ar re vat koulz hag ar re fall : ar c'hwesda an hini eo.**

Pajenn 3

Tad : **-Ar stekiñ eo an deirvet skiant. Gwarezet omp gant hor c'hroc'hen. Met servij a ra dimp ivez d'anavezout ar pezh a zo en-dro dimp. Ha... A-bouez eo !**

Pajenn 4

Tad : **-Ar gweled eo ar bedervet skiant. A-drugarez d'hon daoulagad e welomp a-bell, a-dost...**

Merc'h : **- Me, pa sellan a re dost, ne welan ket sklaer ! (c'hoarzhadennoù)**

Pajenn 5

Tad : **-Ar c'hleved eo ar bempvet skiant. Gant hon divskouarn e klevomp son ar gitar, da skouer.**

Merc'h : **-Ne oarez ket, ma zad ? Pa vezan trist ha pa glevan ac'hanout o figeriñ an nor e sederaan diouzhtu.**

Pajenn 6

Merc'h : **O ! Brav eo !**

Tad : **-Pa zizoloer un dra bennak evit ar wech kentañ e teu hon holl skiantoù war-evezh evit anaout ha kompren anezhañ gwelloc'h.**

Pajenn 7

Merc'h : **Hag ar skiantoù all, ma zad ?**

Tad : **-Ma, klev ! Pa 'n em vesk meur a skiant e teu skiantoù nevez, evel hini ar c'hempouez. Pa soñjer mat, a-bouez-bras eo se ivez !**

## 20

## AN NEDELEG

Digoradur

Merc'h : **Ac'hanta, mamm ! Kontañ a ri un istor all din ?**

Mamm : **Ya, hini Nedeleg ?**

Merc'h : **O ! Ya !**

Pajenn 1

Merc'h : **-Mamm ! 'Mañ ar vugale oc'h ober kraou ar Mabig Jezuz !**

Mamm : **-Ya ! Lidañ 'ra Nedeleg ganedigezh Jezuz. Ur gouel kristen eo. Met an holl dud a c'hall festiñ laouen ma fell dezho.**

Pajenn 2

Mamm : **-E pep lec'h e santer doare ur gouel. Leun a c'houlou a vez e kêr.**

Merc'h : **-Ha leun a c'hoarielloù am eus gwelet e-barzh ar staliou !**

Mamm : **-Ya, mont da sellet outo hep prenañ netra a c'heller ober zoken, fentus eo !**

Pajenn 3

Merc'h : **-Sell 'ta, mamm ! Ar paotr bihan a zo o sikour e dad da zougen ar sapin.**

Mamm : **-A ! Pa erru ar gwez-sapr en tiez eo ur sin a levenez hag a laouenidigezh.**

Pajenn 4

Mamm : **-Neuze e vez dibabet ar bravañ lec'h a zo en ti evit lakaat ar wezenn-sapr. Fichet e vez gant garlantezennoù, bouloù, ha 'bep seurt traoù brav.**

Pajenn 5

Merc'h : **-Ne oarez ket, mamm ? Er skol hon eus kinklet ar saprenn hon-unan, gant garlantezennoù hon eus troc'het e-barzh follennoù paper. Ha war-lerc'h hon eus kanet gant ar vestrez-skol. Euzhus e oa brav !**

Pajenn 6

Mamm : -**Da Nozvezh ar Pellgent e laka an holl o bofeier ouzh troad ar wezenn-sapr pe an oaled. Profoù a vez kavet enno an deiz war-lerc'h. Lavaret e vez eo gant an tad Nedeleg int bet degaset e-kreiz an noz.**

Pajenn 7

Mamm : -**Pa soñjer mat, ur mare mat eo Nedeleg evit soñjal en dud all.**